

## KIS-853 – Notennoù gramadegel XXII – An darlezañ

(GE – 14 08 05)

### AN DARLEZAÑ

Al lavar komzet, pe lavar teodel, zo dezhañ daou arvez : *a*) un arvez boutin etrezañ hag al lavar skrivet, *b*) un arvez na noter ket peurliesañ el lavar skrivet.

An arvez boutin etre an div furm eus al lavar eo ar vezañs enno eus daou genvelladur : rannet e c'hell bezañ nep bomm lavar e tammoù izek, pep tamm o tennañ e unded klevedel pe weledel eus e ster (kentañ kenvelladur, sk. : *brav / eo / an / amzer*, peder unvez), pep tamm disoc'het eus ar c'hentañ kenvelladur o vezañ rannadus d'e dro e tammoù bihanoc'h o tennañ o unded eus o son (eil kenvelladur, sk. : *a / m / z / e / r*, pemp unvez)<sup>1</sup>.

An arvez all eus al lavar komzet n'eo ket trevnad an daou genvelladur evit ober reiz warnañ, hag estren eo d'al lavar skrivet. C'hoarvezout a ra eus teskad an naousterioù sonel o tasperzhiañ en arc'hwelioù ar gomz : uc'hder, read, pad ar sonioù, doareoù sonerezhel steuñvenn ar prezeg — da skouer, ar bomm *deuet eo Paol* a vo klevet evel un diogeladenn mar chom plaen uc'hder ar sonioù anezhañ, evel un atersadenn mard a an uc'hder war sevel. An digorell (?) lakaet en degouezh goude ar frazenn skrivet a ziskouez e noter a-wechoù elfennoù teodel 'zo er-maez eus amgant an daou genvelladur.

An *darlez* g. pe *darlezañ* a reer eus an kez teskad naousterioù sonel o tasperzhiañ en arc'hwelioù ar gomz<sup>2</sup>. Amjestr eo ober un elfennadur

---

<sup>1</sup> A-zivout an daou genvelladur, sl. La-07 5 hh., La-08 170, La-10 23. N'eo ket prepoz an notenn-mañ ober stad eus an anvadoù diseurt o deus an aozerion c'hallek, alamanek ha... brezhonek lakaet war ar rannennoù didroc'het gant an daou genvelladur. A-walc'h eo teurel ur sell war La-07 5 hh. evit kaout un alberz eus neuennusted an hanc'herieg en dachenn-mañ — evel e tachennoù all ar Yezhoniezh.

<sup>2</sup> Sl. La-12 195 n. 2.

reizhiadek eus doareoù steuñvenn ar prezeg a renker dindan skritell an darlezañ ; an arbenn eo emeur ganto e kroazhent ar yezhoniezh, an dareulerezh, ar varzhoniezh hag ar sonerezh. Un trosell ne c'hallimp ken ober warno dre reiñ un alberz eus ar re bennañ.

### AR READ

*Read* ur son eo e greñvder keñverel e steuñvenn ar prezeg<sup>3</sup>. Emañ e dalc'h arc'hwelerezh organoù ar mouezhparañ (nerzh argrezañ kigennoù ar brusk, derez digorded an tarz, alese brasted kas an aer ec'hanalet). Kemm a lakaer etre read ar c'hensonnoù ha read ar sonennoù.

### AR SKOAD

*Skoat* ur son a c'hoarvez eus e uc'hder ha/pe e read e-barzh steuñvenn ar prezeg. E se e tiforc'her :

Ar *skoat uc'hder*, a reer anezhañ ivez an *ton*. Hervez argemmadoù ar skoad uc'hder e diabarzh ul leñvenn, e komzer a-getep eus *ton arskiltra* pe eus *ton arvouta* hervez ma kresk pe ma tigrask uc'hder ar son e-doug deluzadur al leñvenn, eus *ton arskiltra-arvouta* pe *ton kernek* pa gresk da gentañ an uc'hder evit digreskiñ goude, eus *ton arvouta-arskiltra* pe *ton nantek* pa zigresk da gentañ an uc'hder evit kreskiñ da c'houde. Ur skoad a uc'hder ingal zo un *ton unvan*. Bodañ a reer dindan an anvad *skoat kerzhennel*<sup>4</sup> ar skoadoù a c'hoarvez argemmadoù en o uc'hder e diabarzh an un leñvenn.

Ar *skoat read*, a anver c'hoazh *taol mouezh*. Ar skoad read a reer anezhañ *skoat kreñv* pe *skoat gwan* hervez an derez read anezhañ. E diabarzh al leñvenn, e tiforc'her ar *skoat arzerc'hav*, ar *skoat arziskenn* hag ar *skoat arzerc'hav-arziskenn*<sup>5</sup> hervez m'emañ poent ar read brasañ e dibenn, e deroù pe e kreiz al leñvenn.

<sup>3</sup> Gwell e kavan lezel a-gostez an termenoù kinniget evit arouezañ kreñvder bevedel ha kreñvder fizikel ar son, eleze Br. *klevrez*, *tregern* (sl. La-08 277), ha reiñ ur c'hemeradur nevez d'an termen *read*, arveret e diskiblezhioù alvezel (sl. La-06 54) loet pell diouzh ar Yezhoniezh.

<sup>4</sup> Termen kinniget er skrivad *kerzennel* gant Perig HERBERT (sl. GAGB 238).

<sup>5</sup> Kinnig a ran chom nes d'an termenoù en arver e kembraeg diwar ar 16<sup>t</sup> kantved : *acen ddisgynedig* (*ddisgyniannol*), *acen ddyrchafedig* (*ddyrchafiol*).

Ar *skoad kemmesk*, pe *lamm mouezh*, da gedrannoù ennañ ar skoadoù uc'hder ha read.

An anvadoù a-zioc'h a lunian dre loc'hañ diwar ginnigadennoù VALLÉE ; keñver ha keñver, amañ dindan, er bann kentañ an termenoù a ginnigan hag en eil bann an termenoù a gaver e VALL 5 :

<i>skoad</i>	<i>ton</i>
<i>skoad uc'hder, ton</i>	<i>ton skiltrañ</i>
<i>skoad read, taol mouezh</i>	<i>taol mouezh, taol skeiñ</i>
<i>skoad kemmesk, lamm mouezh</i>	—

Ouzhpenn ar skoadoù uc'hder ha read, ez eo bet deskrivet :

Ar *skoad padelezh*, a-geñver gant padelezh deluzadur ar son.

Ar *skoad hangren*, a-geñver gant daskemmadoù an hangren.

### AR C'HWIVADUR

Ar c'hwivadur<sup>6</sup> a c'hoarvez eus argemmadoù uc'hder ar vouezh er gomz, eleze eus neuennadur an tonioù douget gant al leñvennoù kenheuilh a ya d'ober steuñvenn ar prezeg.

Ar *c'hwivadur kevrizh* eo an hini a seller evel naouus d'ur yezh, eleze da brezeg ur yezher o komz hep eztaoliñ fiñvenn from pe devezout ebet.

Ar *c'hwivadur eztaoliñ*, en ebeb, eo an hini a gennaou, ouzhpenn stlenn ar c'hennad, stadoù bred pe kefred ar c'homzer :

ar *c'hwivadur kantaezel* eo an argemmadur eus ar vouezh o reiñ da anaout emzalc'hioù bred ar gouzrec'h (from, laouended, tenerded, brouez, c'hwervoni, gwenvrazh, h.a.) ;

ar *c'hwivadur kantveizel*<sup>7</sup> a zeu da ategañ pe da ouzhpennañ luskoù devezout (haeriñ, atersiñ, arvariñ, goulezel, h.a.).

### AN EOLEZ

An *eolez*<sup>8</sup> g., keal nes da geal ar c'hwivadur, a ziforc'her dioutañ diwar-bouez an unvezioù desellet : an unvezioù ez eer dezho dre geal ar

<sup>6</sup> Kv. Kb. “*chwy^f, chwif* [< Clt. \**su9i-mo-* o'r gwr. \**su9ei-* "troi, troelli"] motion, movement, stir, a shaking, a rocking, agitation, oscillation]” (GPC 861).

<sup>7</sup> Emvataat a ran eus ar c'hevenebadur lakaet gant KANT etre *sensibel* (*haezel*) hag *intelligibel* (*meizel*) (sl. La-10 413 V B) ha kevenebiñ *kantaezel* ha *kantveizel*.

c'hwivadur eo an tonioù hag o c'hengeñverioù e-barzh steuñvenn ar prezeg ; e kemm, ez ambreder an eolez evel un unvez vloc'hel, nadet evel furn sonerezhel steuñvenn ar prezeg. Er skouer roet a-zioc'h, an diforc'h etre an div gemalenn a lavar komzet *deuet eo Paol* ha *deuet eo Paol* ? a intenter evel ur c'hemmañ eolez, anezhañ un treuzfurmiñ bloc'hel eus al linenn sonerezhel dre ouzhpennañ ur c'hwivadur kantveizel da c'hwivadur kevrih ar frazenn vrezhonek.

### AN HANLEZ

An *hanlez* pe, e lavar ar pemdez, ar *pouez mouezh* a reer eus an doare dibarek o deus un hinienn, ur strollenn, annezidi ur vroezenn da zistagañ ur yezh. Komz a reer a *hanlez kanus*, a *hanlez Pleiben*, a *hanlez roazhonat ur brezhoneger*, a *hanlez amerikan ur saozneger*...

### AN EZGEURIAÑ

*Ezgeuriañ*<sup>9</sup> zo lakaat ur c'hwivadur kantaazel da zougen war ur gemalenn brezeg evit deouezañ ur fromadenn daer pe ur varnadenn askreel. Hervez ar gemalenn ma toug ar c'hwivadur ez ezreveller :

An *ezgeur* b. pe *ger ezgeuriañ*, sk. : *ac'hanta, foi, o*.

An *tridad*<sup>10</sup> g. pe *bomm ezgeuriañ*, *frazenn ezgeuriañ*, *estlammadenn*. Evel araezioù ezgeuriañ boaziet da sevel tridadoù emañ :

an *tridrez*<sup>11</sup> g., merket gant an *dibenn ezgeuriañ -at*, sk. : *fallat amzer !*

an *adverboù* (*en o arver*) *ezgeuriañ*, sk. : *pegen kriz ar vuhez !, na kaer eo !, na krisañ tra !, na tommat eo !*<sup>12</sup>

Notomp, er skouerioù-mañ diwezhañ, e vez deouezet ar gantaezadenn dre arverañ an adverb ezgeuriañ *na* dirak un adanv *a*) er bonrez (*kaer*), *b*) en dreistrez (*krisañ*), *c*) en tridrez (*tommat*).

<sup>8</sup> Kv. hBr. *eules* (DGVB 169).

<sup>9</sup> Kv. Kb. "gawr [H. Wydd. *gáir* "Ilef", *gáire* "chwerthin" o'r gwr. \*g^a#(r- "galw, crio", fel yn *gair*, *garm*, Llad. *garrío*, *garrulus*] [...] *shout, cry, outcry* [...]" (GPC 1385). Sl. ivez Br. *geur*, *geuriañ*, La-09 262.

<sup>10</sup> Sl. La-09 91, 113, 116.

<sup>11</sup> Sl. La-07 82-83.

<sup>12</sup> Bommoù tennet eus GIBR 2008.

Notomp ivez ez arverer alies ar *sikell* (!) evit merkañ pe evit ategañ an ezgeuriañ.

Kredet 'm eus kinnig termenoù nevez o tennañ d'an ezgeuriañ goude stadañ skorted an trevnadoù kinniget gant an diaraogerion :

	VALLÉE	HEMON	KERVELLA
<i>ezgeuriañ</i>	<i>youc 'hal, garmiñ</i>	<i>youc 'hal</i>	<i>estlammata</i>
<i>ezgeur</i>	<i>estlammadenn, estlammadell</i>	<i>estlammadell, estlammadenn</i>	<i>estlammadell</i>
<i>tridad</i>	<i>youc 'hadenn, garmadenn</i>	<i>estlammadenn</i>	<i>estlammadenn</i>
<i>tridrez</i>	<i>derez-estlamm</i>	<i>derez-estlamm</i>	<i>derez estlammañ</i>
<i>sikell</i>	<i>poent-estlamm(añ) pik-estlamm, pik-youc 'hal pik youc 'hadennek</i>	<i>pik-estlamm</i>	<i>pik-estlammañ</i>

### GERVA PEDERYEZHEK

*brezhonek* ◇ *gallek* ◇ *alamanek* ◇ *saoznec*

**adverb ezgeuriañ** ◇ adverbe exclamatif

**argrezañ (kigennoù)** ◇ (se) contracter, contraction (musculaire)

**aters, atersadenn** ◇ interrogation ◇ Frage, Fragesatz ◇ interrogation, question

**bomm ezgeuriañ** ◇ expression exclamative

**c'hwivadur** ◇ intonation ◇ Intonation, Betonung, Sprachmelodie ◇ intonation

**c'hwivadur eztaoliñ** ◇ intonation expressive, intonation d'insistance

**c'hwivadur kantaezel** ◇ intonation émotionnelle, intonation affective ◇ Gefühlston, Affektbetonung ◇ affect

**c'hwivadur kantveizel** ◇ intonation logique, intonation intellectuelle, intonation intellectuelle ◇ intellektuelle Betonung ◇ intellectuelle intonation

**c'hwivadur kevrizh** ◇ intonation normale, intonation standard

- daou genvelladur** ◇ double articulation
- darlez, darlezañ** ◇ prosodie ◇ Prosodie ◇ prosody
- deluzañ** ◇ proférer, prononcer, articuler, émettre ◇ aussprechen ◇ utter
- diogeladenn** ◇ déclaration, assertion
- digorell** ◇ point d'interrogation ◇ Fragezeichen ◇ question-mark
- eil kenvelladur** ◇ seconde articulation
- eolez** ◇ mélodie ◇ Melodie ◇ melody
- estlammadenn** ◇ exclamation ◇ Exklamation, Ausruf ◇ exclamation
- ezgeur** ◇ interjection ◇ Interjektion, Ausruf, Empfindungswort ◇ interjection
- ezgeuriadenn** ◇ exclamation ◇ Exklamation, Ausruf ◇ exclamation
- ezgeuriañ** ◇ émettre une exclamation
- frazenn ezgeuriañ** ◇ phrase exclamative ◇ Ausrufesatz ◇ interjectional phrase
- ger ezgeuriañ** ◇ mot interjectif, sl. *ezgeur*
- hanlez** ◇ accent (d'un parler)
- hangren** ◇ timbre ◇ Klangfarbe ◇ timbre
- kemalenn** ◇ séquence
- kentañ kenvelladur** ◇ première articulation
- lamm mouezh**, sl. *skoad kemmesk*
- lavar komzet** ◇ langage parlé, langage articulé, langage oral ◇ Lautsprache ◇ spoken language
- lavar skrivet** ◇ langage écrit
- lavar teodel** ◇ langage oral
- leñvenn** ◇ syllabe ◇ Silbe ◇ syllable
- mouezhparañ** ◇ phonation ◇ Stimmbildung, Lautbildung, Lauterzeugung ◇ phonation
- pad, padelezh** ◇ durée ◇ Dauer, Lange ◇ duration, length
- pouez mouezh** ◇ accent (d'un parler), sl. *hanlez*
- read** ◇ intensité ◇ Intensität, Druck, Tonstärke, Stimmverstärkung ◇ intensity
- sikell** ◇ point d'exclamation ◇ Ausrufungszeichen ◇ exclamation mark
- skoad** ◇ accent ◇ Akzent, Betonung, Tonfall ◇ accent, stress
- skoad arzerc'hav** ◇ accent (d'intensité) ascendant ◇ anschwellende Betonung, steigende Betonung ◇ rising stress
- skoad arzerc'hav-arziskenn** ◇ accent (d'intensité) ascendant-descendant
- skoad arziskenn** ◇ accent (d'intensité) descendant ◇ abschwellende Betonung, fallende Betonung ◇ falling stress
- skoad gwan** ◇ accent (d'intensité) faible ◇ Schwachton ◇ weak stress

- skoad hangren** ◇ accent de timbre ◇ Qualitätbetonung ◇ qualitative stress
- skoad kemmesk** ◇ accent mixte (de hauteur et d'intensité)
- skoad kerzhennel** ◇ accent mélodique
- skoad kreñv** ◇ accent (d'intensité) fort ◇ Starkton ◇ strong stress
- skoad padelezh** ◇ accent de quantité, accent temporel ◇ Quantitätbetonung  
◇ quantitative stress
- skoad read** ◇ accent d'intensité, accent dynamique, accent expiratoire ◇ Intensität-  
betonung, Druckakzent, dynamischer Akzent ◇ stress
- skoad uc'hder** ◇ ton, accent de hauteur, accent mélodique, accent musical, accent  
chromatique ◇ Ton, Tonerhöhung, Hochton, musikalischer Akzent, chromatischer  
Akzent ◇ tone, tonic accent, pitch, chromatic accent
- steñvenn ar prezeg** ◇ chaîne parlée
- taol mouezh**, sl. *skoad read*
- ton**, sl. *skoad uc'hder*
- ton arskiltra** ◇ ton montant, ton ascendant ◇ Aufton, steigender Ton ◇ rising tone
- ton arskiltra-arvouta** ◇ ton ascendant-descendant ◇ steigend-fallender Ton  
◇ high-falling tone
- ton arvouta** ◇ ton descendant ◇ Abton, fallender Ton ◇ falling tone
- ton arvouta-arskiltra** ◇ ton descendant-ascendant ◇ fallend-steigender Ton
- ton ilinek**<sup>13</sup> ◇ ton double, ton complexe
- ton kernek**, sl. *ton arskiltra-arvouta*
- ton nantek**, sl. *ton arvouta-arskiltra*
- tridad** ◇ exclamation ◇ Exklamation, Ausruf ◇ exclamation
- tridrez** ◇ (degré) exclamatif ◇ ◇ exclamative
- uc'hder** ◇ hauteur ◇ Höhe, Tonhöhe ◇ pitch

---

<sup>13</sup> Ton o c'hoarvezout eus daou lusk kevenep lerc'h ouzh lerc'h, anvad rumm evit an *ton kernek* hag an *ton nantek*.